

(255, suite)

Prôn Berrien.

Forc'h e midorc'h, santifia santiforc'h,
 Et eo Jacqeta gant e lorc'h.
 An draman zo tennet demeus santi. itouch,
 Marc'hadour patatez hag a ber-milibouch. Amen.

(256)

Savit oll var ho crabanon,
 Hag e clefot eun darn eus an ordrenançon
 Da g'enta tout, Jannet ar Jort,
 Hag e matez a voa tort,
 Hag eur c'hy a voa er Vouden,
 A zo bet proazet gant eur podad souben.
 Pedomp brema evit Janned ar c'hoq,
 Ha Yan ar yar pe coll e doq,
 Pere o deus roet evit ofrans d'an iliz,
 Eur ponsin, eur c'hanard, eun eujer hag eur viz,
 Eur vigodeñat segal, eur oalendat chifretes,
 Guinis-du d'ober ris, ha ris d'ober patatez;
 An draze evit diminution d'o madou,
 Hag ogmantation d'o fec'hejou.
 Pedomp Doue d'o stoqo ha d'o yistoqo,
 Ha d'o lagat en eur quele-clos in loqo,
 Da foultra o feñ eus ar mog'erion,
 Ha da stotat en o rochedou.

(257)

Pedomp breman evit an otrou ma'n otrou,
 O devez bet laeret ar fleur eus ar c'hoajou,
 Ar brug hag ar framboez, al luz, ar c'hore-ven,
 Ha calz eus a draou all oupen.
 Pedit evit unan a voa pignet,
 En beg eur veen, pa voe poulset;
 Hag en devoa sonjet pignat daou droatad,
 Huelloc'h vit ar beg, pa deu d'an traon gant stad.

214

Pignet e voa er beg, mes coeet eo d'an traon,
 Neur laret in manus, vel ar c'harzic mignason.
 Hag o tîgen d'an traon gant calz eus a estlam,
 Eb gallout bale eon, ez eo bet chomet cam.

Pedomp brema evit un ozac'h eus ar baros-ma,
 A zo èt en Treg'er, a lavar, da stoupa;
 Pedomp Doue ma tremeno ar pont spern,
 Toul milig'et, qercouls ha pont ar vern.
 Ha pa vint pignet var ar mene,
 O devo eun tamic surete.

Pedomp c'hoas evit Ervoan ar Scornet,
 En eur boqat d'e vreg, gant e fri voe bornet;
 Zo èt ive da stoupa en Treg'er;
 Gant Marc'h-Hamon ha boutou ber.
 Doue d'en gasso ha d'en digasso,
 Dilouer ha divoutez, ha divrago d'e vro.
 Gras d'e g'eim da uza e rochet,
 Ma hayo en noas da redet.

(258)

Pedomp c'hoas vit eur zant bras,
 Hannvet sant Babidoc, den bras, ma voe biscoas;
 Ennes voa eur pot fin, vit ma voa lunatig,
 Rac debri rē 'n esqern hag e lêze ar c'hiq.
 Clasqet e voa tud gant ar forc'h
 Da foultra 'n esqern en e gorf.
 Hag e voe forc'het ha diforc'het,
 Gen a deve seis gant diaoul d'er quelet.

Panez ar Person eus Lanneur,
 Zo èt gant laer, n'ouzer get p'eur,
 O deus antreet en e gampichou,
 Ha cahet en e gabinejou,
 Casset gante eur boutou preñ,
 A vije gant an otrou pa lare e ofern.
 Peurvuya en o laqe e qichen e voele,
 Da servich da bod-cam, p'en dije eun uvre.
 Eur plac'hic coant ha fresq, a voa gantan en tej,
 Cathel ar Houillouren a halvret anezji,
 A-dronse 'lostèn var e feñ,
 Hag a stote er gavallen.

(259)

C'hoas e lerer brema ebars er scrit,
 Gement hini a achap, peurvuya a ya quit.
 Me a zo mab-ena da Izabel ar Vrac'h,

Dibot, me a gred din, astur em anafac'h.
 Me zo niz da Yoen ar Vris-du,
 A ra ar brava tout brignien gant quinis-du.
 A ra cafe eb sucr gant un tam colo qerc'h,
 Hag a ra d'ar merc'het diredet var va lerc'h.
 Teir nosvez zo nemeus get cousquet,
 Nag hini va zaoulagad ur moment digoret,
 Gant ar c'hoen demeus va drailla,
 -- al taon: demeus va frailla.
 C'hoen du, ha c'hoen goen, ha c'hoen baill;
 An diaoulou - man eo an draill.
 Re ar merc'het eo ar goassa,
 Me zo aprou a g'ement-ma.
 En de-all e tapis unan gant va dorn,
 Hag an tam-ar-fellbr a voa borm,
 Ha me mont ganti da di eun Doctor medecin,
 Hanvet Parafaragaramus - Diafoerus - Merlin,
 Ha me e laqat var an douar,
 Setu-y o saillat etre o diouar.
 Hag an hini goz comans da voela,
 Hag ar vreg a deuas da zispega
 Per milibouch, deus beg e dal,
 Hag o crafat en eur plas all.
 Qerez, rêzin, avalou poaz,
 An druze a blije d'ar goaz;
 Mes Mari Franseza a voar pez tam
 A blich muya da verc'h he mam.

(260)

P'on eus pedet evit an dud,
 Pedomp breman evit al loened mud;
 Pedomp evit ar brinig hag ar rigadel,
 Hag evit ar bigornet, ma cresqint gant avel;
 Erit ar pesqet hir, evit ar pesqet ber,
 A zo var bord an od, stag demeus ar reyer.
 Piou benag en defe clêvet enep tu,
 Comz eus eur c'holle bris ha du,
 Dianqet creñ abraone dec'h,
 A abarchante da Yan glec'h,
 Absolu e ranger e gaout,
 Da ober loeyou bras d'ar zaout.
 Er sizun man nag er zjioun all,
 Neus gouel ebet na mat na fall,

(261)

A g'ement a rae coll ouzoc'h,
 Ha c'houi a entent, pennou moc'h?
 Gouel Bigornic zo demerc'hez,
 Mes casset eo da zergoener,
 Erit ma c'hallo 'r pesqetaer,
 Goerza e draou eg'is eul laer,
 Erit va c'homper Pieres ar Rouz,
 A dle chareat din eur foultron garad plouz.

(262)

Bea zo brema promessa a Briedelez
 Etre eur c'houblic yaouanq a ya da ober selez,
 Hanvet Per - Mistiflor - Seladon Boutebars,
 Ha Mari - Jan - Mindous - Lipeta Lamer hars.
 Bea zo c'hoas eur bromessa 'briedelez,
 Mes goude eur g'inivelez,
 Entre Lucas - Mari Dagorn,
 Ha Gileta - Jannet ar C'horn.
 Bea zo erit echui en oll,
 Promesse entre daou goz foll,
 Hanvet Jeromic genta m'allo,
 Ha Lichibonic genta ma triapo.

Piou benac a voefe eur ampechamant benac,
 Var ar piniñiou - man, pe en mic pe en mac,
 A zo obliget da zont da benifiet,
 Dindan boan da verza daonet.

Ancoiët en boa lavaret dec'h disul,
 C'houi oll am zelaou, pennou mul,
 Penos Yan - Jourdren - Fanch an Terc'h,
 En deveus roet dec'h trivoc'h palervarq qerc'h,
 Erit beza digoefet e verc'h.

(263)

Amen.